




R. MICHEAU-VERNEZ

Cliché OLOÉ

Bleun-Brug

Niv. 75 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

DU 1954

TAOLIT EVEZ MAT

Diwar an niverenn-mañ, evit kement a sell ouz ar c'houmanañchou, adkoumanañchou, chench adres e vo ret skriva ha kas an arc'hant da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Eur bern a zo ha n'o deus ket paet o c'houmanant 1954 ha meur a hini o c'houmanant 1953.

Arabat d'eoc'h kredi e c'hell « Bleun-Brug » beva gant aer an amzer. An em c'houlennit eta ha paet eo ganeoc'h ho kourmant. Ma n'eo ket kasit raktal dre ar post, d'an adres a welit uheloc'h (hep lakaat ano all ebet nemet : **BLEUN-BRUG**) :

Kourmant ordinal 500 lur.

Kourmant a enor 600 lur.

Kourmant madoberour 1.000 lur.

AR SKRIDOU a zo da gas evel araok, da :

M. l'Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

AR SKODENNOU IZILI ha kement a sell ouz ar skol dre lizer a zo da veza kaset da :

V. SEITÉ, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère). — **C.C.P. 544.22 Nantes.**

SKOAZELLER : 200 LUR — EZEL : 500 LUR — MADOBÉROUR : 1.000 LUR.

TAOLENN

Ar re ne dremenont ket, gant L. B.	1
War dreuzou ar bed all, gant Pol Kerellek	2
Kimiad, gant Dir-na-Dor	3
Noz-veilh ar gov, gant J. S.	4
War roudou ar Sent, gant an Ao. Perrot	7
Ma freder 'zo gant ar bed all, gant Ritian	8
Atao e pinijenn, gant K. Rieu	9
Kan ha Diskan, gant L. Roparz	10
Avanked koad Pontkalleg, gant Job Jaffré	11
Paper koz, gant L. L.	12
Keleier	14
Klevit 'ta	16
Vœu du C. G. du F.	17
Ar Chistr nevez, gant L. Herrieu	18

Unnekvet deiz ha bloaz maro an Ao. Perrot

An 12 a viz Kerzu a zigas d'eomp da soñj adarre eus maro an Aotrou Perrot, drouk-lazet e-kreiz an hent deiz gouel Sant Korantin, goude beza bet o lavaret an oferenn e chapel Sant-Korantin, e Skrignag.

E koun an Aotrou Perrot hag evit repoze vat e ene, ar Bleun-Brug a lavaro eun oferenn evitañ, d'an 12 a viz Kerzu, e chapel Itron-Varia, Koatkeo-Skrignag, el lec'h m'eo douaret e gorf.

Pedi a reomp hor mignoned da zont niverus da glevet an oferenn-se, pe da veza a galon ganeomp.

AR BLEUN-BRUG.



133687

Ar re ne dremenont ket

D'an 13 a viz Du, er bloavez-mañ, e vezo c'houezek kant vloaz abaoe m'eo bet ganet, du-hont en Aljeri, an hini a dlle beza unan eus ar brasa sperejou a zo bet biskoaz : **Sant Aogustin**. Gouelioù kaer a zo lidet en e enor, eun tammig e pep lec'h, dre ar bed kristen.

Bet doktor kenta an Iliz, Sant Aogustin a zo bet ive moarvat ar gouisioka.

Den all ebet n'en deus sanket dounoc'h e alar e park an deska-durez kristen. N'eus tachenn ebet, ha n'en defe klasket difonta, kudenn ebet euz misteriou ar vuhez hag ar maro, ha n'en defe ket klasket diluzia.

Warno holl, en deus taolet bannou lugernus a sklerijenn.

Ha setu perak evit gwelout skleroc'h o hent ar sperejou uhela, a-dreuz ar c'hantvejou, o deus en em blijet o vont d'ar skol gantañ, hag oc'h en em vaga eus e gentelioù.

Ar c'hentelioù bet roet gantañ diwar-benn Doue, an ene, ar vuhez da zont, ne gosaont tamm. E kreiz an amzeriou trubuilhus ma vevomp enno, e chomont eur feunteun leun a sklerijenn evit ar sperejou, leun a domder evit ar c'halonou.

Pa glask kement, hirio, soursi traou an douar mouda ennomp betek ar soñj eus traou an neñv, nag e ra vad d'eomp en em lezel ive da veza kenteliet gantañ.

Ar wirionez pouezusa a zesk d'eomp, evit hor sikour da c'houarn mat hor buhez, eo an ezomm en deus an den eus a Zoue, evit beza eurus. Nag an arc'hant, nag an enorioù, nag holl vadou an douar, daoust pegen touellus int, n'int ket goest da derri an naon eursted a zo gwrizennet ker start en hor c'hreiz.

Evit karga e galon, ken alies enkrezet, an den en deus ezomm eus madou dounoc'h ha padusoc'h eget re an douar. Ezomm en deus, hep mar ebet, a vara evit e gorf, met ive, evit e ene, e galon hag e spered.

N'eus ket diou eienenn a eursted, n'eus nemet unan : Doue.

Dirak e bep seurt nevezentiou a weler o tispaka, war bep tachenn, hag a jeñch doare d'hor buhez, ez eus kalz hag a ya betek kredi e teuo an dud, gant o galloud hag o ijin o-unan, da drec'hi ar boan ha da ziazeza, eun deiz, ar baradoz war an douar. Follentez, a gredomp-ni, rak ar skiant vat a ziskouez d'eomp, n'ez a an eursted war-araok etouez an dud, nemet gwellaenn a deufe, en hevelep amzer, en o c'halon hag en o buhez.

An den, ma n'eo ket harpet ha splerijennet gant Doue, a jom eur paourkez den, lavaromp kentoc'h e teu da veza eur gwall zen, abred pe zivezat...

Chom a ra gwir, ha chom a raio, ar pezh a lavare Sant Aogustin :

« C'houi eo, o va Doue, ho peus graet hor c'halon evidoc'h, ha n'eo nemet o tiskuiza warnoc'h hag oc'h en em vaga ac'hanoc'h, eo e kav ar peoc'h hag al levenez gwirion ».

Deskomp gant an doktor bras dizelei, en traou krouet a zo en-dro d'eomp, ar skeud eus peurvadelezoù Doue, hag o pleustri warno, karomp lavaret evelañ : « A ! re zivezat am eus ho karet, o va Doue, gened bepred koz ha bepred nevez, re zivezat am eus ho karet... »

L. B.

War dreuzou ar bed all

Al lodenn vuhez-mañ a dremen e bannleo Pariz. Eur paotr-micher kalvez, 17 vloaz, Aogustin B..., a zo o paouez ober eur gwall-lamin. Dre eur gouli bras en e beultrin, ar gwad a red puilh hag ouspenn e izili a zo ivez gwall-vac'hagnet. Buan eo bet digaset d'ar c'hlañvdi tosta.

Ar paourkêr Aogustin en deus gwelet alies beleien o tont pe o vont dre straedou kêr, disfiziañs en deus eun tammig peseurt doare micher o deus. Met n'oar ket muioc'h. Evitañ, an iliz hag ar c'hatekiz a zo traou estren. A-vec'h m'eo bet badezet. E vamm eo a fellas d'ezhi hag an dra-se en despet d'an tad.

Betek hirio, traou ar bed all n'o deus ket hen trabaset. Met bremañ an termen a zo aze, tost kenañ. Er gambr m'emañ enni astennet, ez eus roet d'ezañ an niverenn daou-ha-tregont. Eur medesin yaouank, Stephan R..., a zo war e dro. Goude, Aogustin a c'hell kousket eun nebeut. Met an noz a zo bet fall.

Diouz ar mintin, kerkent ha ma tosta ar medisin yaouank ouz a wele, Aogustin a c'houlenn digantañ : « O vont da vervel emaoñ ? Na lavarit ket nan, rak re wir eo. Lavarit d'in kentoc'h, c'houi hag a zo desket, *pa varver da belec'h ez eer ?* »

Desket ? ya war ar c'hlañvejou, al louzeier... Met war doareou ar feiz ne oar netra. Mab eo d'eur medesin hag a lavar n'en deus gwelet morse ene ebet war beg e veñveg. Edoug e studi, Stephan R... n'en deus ket bet kennebeut na klevet na lennet ano Doue. Rak-se e chom sebezet o klevet goulenn ar c'hlañvour. Da belec'h ez eer pa varver ? — Ar paourkez den yaouank-se a gav d'ezañ marteze e vez desket traou evel-se er Skoliou-Meur.

Soñjal a reas da genta respont d'ar c'hlañvour : « Mat, n'ez eer da nelec'h, va mignon paour. Echu ar vuhez, n'ez eus netra goude ».

Ne gred ket hen ober avât. Ha pa wel sell ken truezus ar c'hlañvour o para warnañ, e lavaras : « N'ouzon ket ».

— « Penaos, ouzoc'h ket ! », eme Aogustin mantret. Hag e zaoulagad o virvi, enkrezet, a lavare sklêr :

— « Daoust ha n'oa ket an dra genta da zeski ? »

— « Nann, n'ouzon ket, a lavaras evit an eilvet gwech Stephan. An dra-ze n'en deus tamm talvoudegez evidomp rak n'eo ket goulennet en hon testi-studi. Met bezit dienkreiz, va mignon kêr... »

— « Beza dienkreiz ! a vousklemmas ar c'hlañvour !... Beza dienkreiz !... Ai dra-se ne c'hell ket beza... pa guitaer ar vuhez-mañ... evit atao... hag hep gouzout... da belec'h ez eer ? »

— « Eun dra bennak all a c'hoantait c'hoaz ? a c'houlennas Stephan gant eun vouez leun a zouder. Sellit : eun tammig oranjez.

Ar c'hlañvour a gemeras, ha kerkent e lavaras : « Me 'garfe gouzout ».

— « Dreist hor galloud eo », eme ar mezeg. Met pennek evel eur Breizad. Aogustin a gendalc'has : « Tud a zo hag a car. — Ha piou ta ? — Ar veleien.

— Hen lavaret a reont. — Ha ma vije gwir ar pez a lavaront ? »

Ar mezeg ne respontas ket er wec'h-mañ... Met an den yaouank a grogas ennañ gant e zaouarn sklaset... hag a lavaras gant e holl nerz :

— « Me 'fell d'in gwelet eur beleg... Kasit... unan bennak... da glask eur beleg »

Ar c'hlañvdiour a voe galvet : « An niverenn daou-ha-tregont a c'houlenn eur beleg. Grit gervel unan dioustu ».

Ar c'hlañvdiour a hejas e skoaziou en eur lavaret : « Eur beleg amañ... ».

Met n'oa ket da lavaret nann rak lezenn ar c'hlañdi a yoa sklêr war ar poent-se.

Eur pennadig goude ec'h errue ar beleg. Ar mezeg hen saludas hag her c'hasas da gichen ar gwele daou-ha-tregont. War zremm ar c'hlañvour e c'helle dija lenn al levezeg vrasa... Ar beleg a yoa gantañ peb tra. A-vec'h m'en doa echu, Aogustin B... a roe e ene da Zoue.

Stephan R... a zigouezas kerkent : pebez peoc'h war zremm an den yaouank !... Ar relijion a zo evit doare eun dra c'halloudus kenañ war an den ! « Ha ma stagfen d'he studia », emezañ outañ eunan.

Eun nebeut devezioù goude ez eas da skei war dor ar beleg en doa gouezet rei ken buan peoc'h ha levezeg d'an den yaouank ken trabaset gant traou pouezus ar bed all.

Pol Kerellek.



KIMIAD

(E koun Evnig-Arvor)

Koll glac'harus ar c'holl eus eur mignon feal !
Tec'het diouz ar bed-mañ, nijet eo d'ar bed all
EVNIG ARVOR, 'n e veo difennour e Vro goz,
A-vremañ o pedi 'viti er Baradoz.

Barz e galon dener ha kaner e vouez flour,
Skouerius e holl vuhez, hi skler evel an dour,
Renet gantañ dindan lezenn ar baourente,
Servijer e vamm-vro e skeud servij Doue.


Hano Evnig Arvor ne chomo ket divrud,
Keit ma kano Kerne — na nan eo ket c'hoaz mut,
Kichen Barzed Kerne e benn 'savo uhel
Tre e vignon Porzer ha Loïz Porz Ikel.

Eur boked oa dleet da baeron O-lo-lé,
Douget warlerc'h e gañv en dorn ar vugale ;
Daoust ha na glevas ket, en e eur diwezañ,
Eur frealz d'e galon, o mouezioù o kanañ ?

Neb 'n eus, hed e vuhez, rentet enor d'e Vro,
Dleet eo ve miret gant doujañs e hano ;
Gant se, Evnig Arvor, ho hano vo skrivet
En lizerennou aour, e-touez en holl Varzed.

Ebrel 1954.

An Dilerc'hiad (Dir-na-Dor).



NOZ-VEILH AR GOV

Reun, ar gov eus Kroaz-an-Hent, a zo bet kavet maro da c'houlou deiz, azezet e-tal e zor.

Evelse-se eo e veze gwelet peurlïesa, dirak e c'hovel teñval ha mut, abaoe ma oa warnañ kouezet ar gozni.

Den ne veze war e dro. E dad-kaer a oa maro. Ha prestik goude, e wreg ivez. Hag e vamm-gaer, abaoe abardaez an anteramant-se, penn kristen ebet n'helle lavaret petra e oa deuet da veza.

Piou e oa an den-se ? Dalc'mat tavedek, aon a rae d'an holl.

Eus pe vro e oa ginidik ? Deuet eus an tu all d'ar Menezioù, ne anavezet d'ezañ na kar na par.

Pa zimezas gant merc'h ar gov, e vestr, diouz e gostezenn d'ezañ, ne deuas den d'an eured.

Holl dud vras ar geriadenn a zo aze bremañ dirak ar c'horf sonnet astennet ganto war e wele diweza.

Ranket o deus bet mont da glask, er-maez an ti, goulouenn ar chandelour, ar bod beuz hag an dour benniget. Ar groaz zokén.

Ar chapeled a zalc'h d'ezañ skoulmet e zaouarn, a zo bet roet gant gwreg ar miliner. Truez a zo evelato ouz an dén dizoue en deus bevet evel eur bleiz ; ne vo ket douaret evel c'hi.

E-keit ha ma sav, e teñvalijenn an noz, pedennou kañvus an noz-veilh eo gwasket kriz kalonou ar merc'hed hag ar wazed daoulinet e-harz ar gwele.

Evel luc'hed, e tarz en o spered tamallou spontus bet graet d'an dén-se e-pad e vuhiez.

N'en doa darempred gant dén nemet gant Thei ar C'hloc'her.

Petra 'rae d'ezan evelse beva evel eur bleiz mut en e doull kuz ?

Hag e varo trum, en ti-se, hag a vo war-c'hoaz disher ha divuhez, ha n'emañ ket war-nañ malloz Doue ?

Ne chom kén en ti nemet an amezeien dosta, ha prest eo ar re-mañ da vont ouz taol evit pred an hanternoz.

Deuet eo ar mare da serri an nor. N'eus forz da belec'h eo bet kaset gant an Ael, pell-pell emañ bremañ ene paour ar gov.

Serret eo an nor. Er-maez emañ an noz du. En ti leun a gañv, sklerijenn morlivet ar goulou a strink er c'halonou eun ankén hag a wash ken skrijus, ma tarz ar spont war dremmou ar re o doa gwelet ar polis oc'h ober enklask.

Soaz, ar walc'herez, d'ar mare-se, pastorez deñved, a gavas war an tevi-nier, mantell-gañv Katarin hag he boutou laket warni.

— « Ma Doue ! m'am bije gouezet an trabas am eus bet abaoe, en abeg d'ar gavadenn-se, em bije lezet an avel d'o stlapa er mor don. »

Gait, gwreg ar miliner, he deus soñj mat eus an amzer ma 'z ae gant Katarin da zevi bezin war an aod :

— « Katarin, Doue r'he fardono, a oa eur gristenez vat, hag eur vaouez kalonek. N'eo ket posubl e vije bet-hi aet d'en em veuzi. Piou neuze en deus laketa war an teven mantell-gañv ar vaouez paour ? »

— « N'eus ket eun dén, eme Vari-Zu, hag a vije hep gouzout pegen diés he doa kavet Katarin gwelet he merc'h o timezi gant mevel he gwaz. Pa gollas he merc'h, ar c'hlaç'har-se eo a reas d'ezhi mont da chom, he unan, er penn-ti koz a zo e traoñ ar porz... »

Ar gov en doa goulennet digant Herri ar mañsoner, dont d'ober d'ezañ labouriou war-dro e di er sizun warlerc'h :

— « An archerien a fellas d'ezo va lakaat da ziskleria, e oa distroet Reun, eus anteramant, e wreg, mezo dall, hag e oa bet trouz bras etrezañ hag an hini goz, hag en dije bet hemañ skoet ganti didruez hag he laketa da goueza war ar vein... hag en doa goudeze kuzet ar c'horf maro... » Perak 'ta, eme an archerien, en dije-heñ goulennet diganez simanti d'ezañ e graou ma n'eo ket evit kuzet an terfed ? » Evidon-me a gave d'in hepken e oa gwall breset da zispign an arc'hant en doa kavet e-barz armel an hini goz. »

Thei, Kloc'her ha touller beziou, a oa bet heñ ivez, goulennatet, gant an archerien.

— « Diwezat-tre, eun abardaez, e teuas unan anezo da skei ouz va dor. Edon em gwele. Sevel a rankis. Mont d'e heul gant eur bal hag eul letern. Tost amañ, e chomas a-sav, hag o lakaat ar goulou d'in em daoulagad e lavaras garo : « A-walc'h a farserez ! Touller beziou, it da doulla el lec'h m'emañ ar c'horf ! » Spontet, chom a ris abafet dirazañ. Hag heñ, kounnar ruz ennañ a lavaras d'in neuze, distrei buan d'ar gêr. »

Trêde devez an enklask a oa eur sulvez.

Goude an oferenn-bred, en eur zont eus an iliz, Youen ar pesketaer a ran- kas mont etre daou archer betek e vag war ar sec'h, en aod.

— « Perak, eme d'ezañ neuze an archerien, ez oc'h aet er mor en noz-se ? »

— « Petra em bije lavaret nemet e oan partiet d'ober eun droiad. Aet e oan, e gwirionez, da furchal kavellou legistri an Tomas koz, Doue r'e bardono, en doa, araok, furchet d'in va re, met n'hellen ket lavaret kement-se d'an archerien, p'edo an Tomas koz em c'hichen hag e zaoulagad a-bik o para warnon. M'en dije gouezet, gouest a-walc'h e oa da zont d'in war vor, ha d'am beuzi. A drugare Doue, sklerijennet e oa ar c'hae en noz-se, ha kavet testou da lavaret e oan aet va unan war vor. »

✱

Klet, ar miliner, a oa bet kaset gant e dad, da gas bleud gant ar c'harr, da di Per Gabon. El lec'h dont d'ar gêr dre an hent bras, e oa distroet dre an hent koz a dremen alies tostik-tost d'ar mor.

— « Soñj am eus e wigourre rodou va c'harr war ar bili evel ma vije bet « karrig an Ankou ». Met, va Doue ! n'em boa ket da veza nec'het. Perak e vijen bet ? N'oa horf maro ebet ganin er c'harr !... C'hoant a oa deuet-ennoun, ha netra kén, da welet va muia karet, hag eviti eo em boa graet an droiad-se. Per Kabon, marteze, a salvas d'in va buhez, pa fazias en eur lavaret e oan tremenet eno eun heur abretoc'h. »

✱

Troc'het e oa ar gomz da bep hini gant an nor o tigeri. Noun, ar c'hasker bara a deuas en ti. Hep eur gêr, hep teurel eur sell war an daoliad, ez eas war eñ dirak ar c'horf maro. Ober a reas sin ar groaz ha chom en e-sav sounn dirazañ, evel eur peul.

Thei, avât, a sav, ha rust e lavaras da Noun :

— « Kea d'en em skrabat d'al lec'h ma kari. Amañ n'ec'h eus mui netra d'ober. »

Noun, o tistrei, a respontas :

— « Dale'h soñj, Thei, n'eo d'it ar wech kenta d'am c'has kuit eus an ti-mañ. »

An touller-beziou a sav e zorn, met ar miliner, kerkent, en em lak etrezo.

— « Goustadik ! Goustadik ! Petra ! c'hoari ganez 'ta Thei ? Daoust ha kollet eo ganez da benn ? Eun tamm gourvez ne rafe ket d'it a zroug araok kloc'h an deiz. »

— Gwir eo ! n'emaon ket mat.

Mont a reas kuit en eur ober sin ar groaz.

✱

Pep hini a chom dilavar, skuiz ha skoet.

Noun a zo aet da azeza e korn an oaled ; Gait a zigas d'ezañ eur volennad kafe tomm :

— « Bennoz Doue ! Bennoz Doue ! Gaidig. »

Hag evel ma veze boazet da gregi gant e gontadennoù da veilhadegoù hir ar goañv e komzas evelhenn :

— « Ne doun-me nemet Noun ar c'hasker bara. N'ouzoun ket zokén peur oun bet ganet, na perak eo bet tonket d'in mont a zor da zor. Pa valean en noz dre al lanneier, e kav d'in bale awechoù dre douez ar stered. Alies e kav d'eoc'h ne doun nemet eun huñvreer, ha padâl, savet eo va marvailhoù diwar ho poanioù, ho laouenedigezioù, hag ivez ho sekrejou... »

Eus lein an tour e sav prim taolioù stank kloc'h an deiz, evel ma vijent o kas kuit an noz. War zremm dislivet an deiz, e strink daeloù ar glaz...

Met petra ! c'hoarvez 'ta ?... Mudet eo ar c'hloc'h a-daol trum...

✱

Trouz bouteier war an hent. Tud a zeu d'ar red eus ar vourc'h. Youc'hal a reont :

— « Thei a zo bet kavet krouget ouz kordenn ar c'hloc'h. »...

Er vered, en eur doulla bez ar gov, eo bet dizoloet korf maro Katarin, asten- net war arched-he merc'h.

✱

— « En nozvez-se, eme Noun, edon deuet d'an ti-mañ da glask repu. Thei ha R-un am stlapas er-maez. »

« Er garnel, goude, e kavis ar goudor, hag ac'hano e welis an daou-mañ, o tougen d'ar vered, ar c'horf maro... »

« Noz-du e oa. Evel an noz-du dalc'het em eus va sekred, rak me, gant an archerien, n'em eus netra d'ober. Dirak an torfed euzus, em c'houstians e lava- ren : « Doue eo, an hini a varno ». »

J. S.



WAR ROUDOU AR SENT

Eürus, eme sant Tomaz a Gempiz, an hini a glask e ziskuiz, n'eo ket etouez an dud, met el levrioù santel hag er pedennoù birvidik ; an hini a vev ervat hag a gar traoù an neñv, evel ma rae ar Sent, a sello muioc'h ouz ar pezh a wel daoulagad ar feiz eget ouz ar pezh a wel daoulagad ar c'horf.

Pep hini a zarempred an dud a zo hervez e galon. Ar c'hristen mat a zarempred kristenien vat ; ar c'hristen klouar a zarempred kristenien glouar ; ar c'hristen fall a zarempred kristenien fall.

Mar fell d'eoc'h eta azeza, kador ouz kador, gant ar Sent er baradoz, eo ret d'eoc'h gouzañv e-leiz a draoù evit Doue war an douar-mañ, ha karout an dismegañs evel m'o deus graet an dud santel-se, rak ne dalv ket nemeur a dra enori ar Sent dre gomzou, ma reer goap anezo dre oberou.

Mar fell d'eoc'h plijout da Zoue ha plijout d'ar Sent, kastizit ho korf, plegit ho polontez hoc'h-unan, stourmit ouz ho techou fall, lakait vertuzioù da sevel ennoc'h, sellit ouz buez ar Sent, lennit o c'helen- nadurez, ha neuze, mar darempredit evelse ar Sent, e vefet sent, e vefet skoazellet gant ar Sent ha kurunet ganto e baradoz an Aotrou Doue.

(« Buhez ar Zent » an Ao. Perrot.)

Ma freder 'zo gant ar bed-all

D'an Ao. Visant Seité.

Ma freder 'zo gant ar Bed-All,
Rouantelez an Ankou dail,
Na gerz d'ezi nikun gant mall.

Enkrez, anken ha garm ha leñv
Koulz da vugel ha da c'hour kreñv,
Goude mervel, 'bars mont d'an neñv.

Hirnez ha skrij, poan ha skrign-dent
Da vab-den paour a-hed e hent,
E-doug e dreiz da vro ar zent.

Er purgator, o c'houzañv yud,
Emañ, siouaz ! anaon hon tud ;
Goulenn skoazell n'hell o zeod mut.

Kalz er bed-mañ ne daolont van
Ouz an Anjôn 'zo 'kreiz an tan
O leski feuls 'raok beza glan.

Pa vo aet o c'horfou da bri,
O eneou a yelo di
E-lec'h ma vint heskinet kri,

Digant Doue n'o do nep bod
Na perz, kennebeut, en E glod
Nemet goude gouzañv o lod,

Nemet pedet 'vefe an Tad
A-greiz kalon, o buhez pad,
Gant o c'herent ha tud o glad,

D'o lemel prim diouz nec'h ha poan,
D'o dieubi diouz flamm ha doan,
D'o c'has timat davet an Oan.

Rak-se tud kar, pe c'hoar pe vreur,
Pedomp Doue, an Aotrou meur,
Da ziboania a-barz nemeur

An Anaon paour a zo er reuz,
An eneou beuzet en euz
Hag, allas ! o keini gant keuz.

Rak ni, ivez, ezomm hor bo
A bedennou pa zeuy hon tro
Da vont d'an harlu d'eur seurt bro.

P'hor bo d'an holl roet skouer vat,
Hor c'herent, o pedi dalc'hat,
'Dorro buanegez an Tad.

Hag hor c'hastiz neuze berraet
'Z ay hon eneou santelaet
D'an neñv. Evel-se bezet graet !

11 a viz Meurzh 1954.

Ritian.

Atao e pinijenn !

6 eur ; rouznozi 'ra. Bannou diweza an heol na sklerijennont mui nemet beg ar pupli, war-du Keris.

Didrouz an hent... A ! du-se, dindan skeud hir-hir ar gwez, eur velo, bleniet gant eur c'hrennard, gantañ eur sac'h-skol war e ziousoaz. Piou ar paotr-se, diwez-zat, e-unanik, d'an euriou-mañ, war an hent hag a deñvala buanoc'h-buana ?... Yannig ar Berr e vleao pik ! Gled eun tammig e zaoulagad ? Petra 'zo c'hoarvezet gant mab nemetañ Kervarz ?

....

— « Mañ ! (kreñvoc'h) Mañ ! Ne din ket mui d'ar skol ! » Difrokadennou, ha dour sall o redek puilh war an dioujad.

Mari-Anna Gervarz a oa o vont da c'horro he saout. Peget he doa er skabell ha prestik e oa da azeza e-kichen an « Hi-Zu » pa glevas he mabig war dreuzou ar c'hraou.

— « Petra 'zo degouezet adarre ? »

— E pinijenn oun bet c'hoaz ! Ar mestr-skol ne ra nemet va laka-me e pinijenn. N'eus ket tu da zeski eun dra bennak gantañ. Hag atao e pinijenn !

— Piou a oa e pinijenn ganit ?

— Tri pe bevar all : Laouig Kerbesk, Loëzig Kerc'hom, ha Per ar Maner. Met ar re-mañ a zo bet lezet prim da vont d'ar gêr. Ha me, me 'zo chomet an diweza... (Klevout a raed al laez o flistra er sailh hag ar saout o frapa ar plouz...) Mañ ! Ne din ket mui d'ar skol !

— Paour-kaezig, bremaik e vo koan. Ha goude ez i da gousket. Da betra e talvez dit deski da genteliou, peogwir emaut laaaet e pinijenn bemdez ? Ne c'hellez ket chom atao da labourat ; kerz da c'hoari. Ha warc'hoaz vintin e chomi er gêr ha me a yelo da welout ar mestr-skol drouk-se hag a glevo diganin e bater. N'eo ket permetet « mao'hagna » (!) evelse eur paotrig en fur ha ken mat ha te. Met, na lavar netra d'az tad. »

....

Mari-Anna Gervarz a yeas diwar diz en ti-skol.

— « E pelec'h 'mañ ar Rener (diresktor) », a c'houlennas-hi digant Katell ar garabasenn. « N'em eus ket amzer da goll amañ. Lavarit dezañ ez eus pres war-noun-me. »

— « Gwelout a ran », a respontas Katell. « Deus tre er sal-digemer, amañ... »

— « N'em eus ket amzer ». »

....

— « Aotrou Rener, va mab Yannig ne zeuy mui d'ho skol. Lakaet e vo ganin er skol all. »

— Pe...

— Bemdez e vez e pinijenn ; noz e vez pa zegouez er gêr ; droch e teu da da veza amañ, heñ ken mat, ken fur, ken speredek. Beñ ! an dra-se 'zo eur vuhez ha ne c'hell ket padout.

— Met...

— Pegement e vankan deoc'h ? Ha mat pell 'zo !

— Pegement e vankit d'ar skol ? Da genta, eun tammig pasianted ! Ho mab a zo chomet e pinijenn abaoe eun nebeut devezioù 'zo abalamour ne ouie kentel ebet. Ha dec'h ez eo aet kuit da bemp eur ha kard, eur c'hard-eur hepken war-erc'h e gamaraded, ha gouezet gantañ e genteliou. C'houi 'wel, ma labourfe eun distera, ne c'hoarvezfe...

— Penaos ? Konta din ez eo va Yannig eur gaouier ?

— Lavarout a ran deoc'h e zeo aet kuit da bemp eur ha kard. Mar deo degouezet er gêr da c'houec'h hanter pe da seiz eur, n'eo ket dre va faot din-me. Klaskit e plec'h ha gant piou ez eo chomet da strani. Met amañ ne oa ket mui abaoe pell 'zo.

— Kenavo, Aotrou Rener ? Me n'em eus ket amzer da goll. »

Ha kuit Mari-Anna Gervars.

....

Yannig ar Berr, gant e vleao pik, a yeas d'ar skol all. Pemzektez... Ha skuiz du-se, evel amañ, gant al labour ha na rae ket.

Setu penaos re alies a — ne lavaran ket atao ! — e tremen an traou. Ne zeuer da welout ar mestr-skol nemet pa gaver ez a fall an traou. Hag ar gerent a gred evel komzou Aviel kement a lavar o bugale. Ha n'o deus ket amzer memes da glevout digant ar skolaer penaos ez eo bet an abaden ! Ha kenavo ! Pe fachidi d'an nebeuta. Evit petra ?...

Nann, deuit da gaout mistri-skol ho pugale memes pa 'z a mat pep tra. Ar skolaer a anavez ho mab er skol. Met c'houi, d'ho tu, a zesko dezañ doareoù ar paotr er gêr. Nag a vad a ray kement-se d'an eil ha d'egile, hep konta d'an trede !

Rak, petra 'glask ar gerent, petra 'glask ar mestr-skol ? « Sevel », diorren ar vugale fiziet enno gant Doue. Evit-se ez eo ret frapa holl war ar memes tu, neketa ?

Ha ma 'z eus eur wech bennak traou eun tammig start da lavarout, arabat evit se kemer an « ton krampouez gwini ». Dre genlabourat (= labourat asambles) eo e vez graet labour kaer. Ha war ar beg douar-mañ, petra kaeroc'h evit sikour eur bugel da zont da zen ?

K. Riou.



KAN HA DISKAN

« Kan ha diskan », setu aze doare kana ar Poher, Kerne ar Menezlou. Er c'hornbro-se emañ ar c'hiz gant an dud da gana daou ha daou, pe diou ha diou, an eil o respont d'egile hag o vont da « glask anezañ » da lavaret eo o kana asamblez gantañ gêr diweza pen poz, pe a zalc'h e lañs d'an ton.

Kanet e veze an toniou-se gant an dud o vont d'o labour bep mintin, pe o tont d'ar gêr, diouz an abardaez.

Klevet e veze evel-se bep mintin ha bep noz, ar mêziou o tregerni gant hor soniou dudius : « Metig ma c'harante, Ar Seiz skiant naturel, Boket ar yaouankiz, Kimiad ar soudard yaouank »...

Pep hini en dao e soniou hag e doniou, pe awechou, e don hag e son, kén e vez e veze laret gant ar merc'hed, oc'h oaza koan en ti : Setu emañ an den-mañ 'n den o tont d'ar gêr, gant e don bras.

Kanet e veze ivez, eveljust, da goulz ar festou-noz, warlerc'h an dastuinadeg foenn, an eost, an tennadegou avalou-douar, ar barradegou, al leuriou nevez, an deveziou bras a labour boutin, hag ivez da goulz ar festou-noz eured evit kas endro an dañsou.

Rak e bro an dañsou kanet cinaomp, ha peurlies, an daou ganer pe an diou ganerez, pe ar c'haner hag ar ganerez, a gemer perz en dañs, o kana hag o tañsal war eun dro. A-wechou ivez e chomont er-maez an dañs o kana diwar o sav.

« Breiz, mor a gan », evel ma lavare an Aotrou Perrot. Ar gêr-se a oa gwir dreist-holl evit rann-vro ar menezlou, ha Mesaerien Poullaouen a fell d'ezo lakaat ar gêr-se da veza gwir endro en amzer da zont, hag ober war ar memes tro, eun taol lañs d'ar brezoneg er Bobl.

Setu perak o deus aozet eur gouel « Kan ha diskan » evit ar 26 a viz Kerzu a zeu.

Diouz ar mintin : Kenstrivadeg « Kan ha diskan », digor d'ar parrezioù tro-war-dro, el lec'h m'ed anavezet an doare kan se.

Rannet e vo ar ganerien e tri rummad : 1°) Rummad en tu all da 50 vloaz ; — 2°) Rummad dindan 50 vloaz ; — 3°) Bugale.

Ar varnerien ne vo nemet brezonegerien anezo, ha ne vo komzet, eveljust nemet brezoneg ganto.

20.000 lur a brizioù emaoimp o soñj ranna etre ar c'hounideien.

Goude kreisteiz : Abaden « Kan, c'hoari ha koroll », gant brezonegerien hepken.

Klevet e vo goun'delen ar genstrivadeg, hag ouspenn-s, kanerien all brudet dre ar vro. Distaget e vo rimadelloù gant tud evel Ar Gall, ha zoken eun tamm pezh-choari fentus : « Mil pok » savet gant eur beleg eus Rostren, ha c'hoariet gant Kêl'h Rostren.

Mignoned ar brezoneg o do plijadur da gaout e Poullaouen, hag a vo gwelet gant plijadur du-ze ivez. Ra zeulo ar muia anezo ar gwella, da Boullaouen, d'ar 26 a viz Kerzu.

Loeiz Roparz.

Avanked koad Pontkalleg

Avanked (pe Kastored) e koad Pontkalleg (Morbihan) ? Ich 'ta ! N'eo ket eur gaou !... Evit lavarout mat, al loened mañ n'int ket « kastored » gwirion, gant o lostigou plad a servij dezo evel eul loa d'eur mañsoner. Nann ! Ar re-mañ a zo kalz bihannoc'h ha ne bouezont nemet dek lur, ha pe vent en oad. Eur c'hastor gwirion en deus alies mat ouspenn eur metr a hirded. Ar re-mañ eta a zo kastored gwernegi, añvet e galleg « ragodins ». Heñvel int ouz konikled bras, pe ive, o lastou hir, ouz razed-dour. O zreid a zo treset evel re an houldi. rak loened evit mont war an dour int. Blevennou gwenn ha hir a zo beb tu d'o fri, evel mourrou. Daoulagad lemm o deus, ha dent liou oranj, hir, a-skourr ouz o muzell, prest da drouc'ha, ken gwaz ha dent eun hesken : diwallit 'ta da astenn dezo ar biz !

O c'horf a zo gronnet a vlevaj. Ar bleo war c'horre, hir ha sec'h, tost kar da reun ar pemoc'h, ne dalv netra ! An hini dindan a zo stank, flour d'an dourn evel d'ar gweled : hennez eo ar feur. Gant ar feur-se e vo tu da sevel eur vantell gaer da Janig evit ar goañv, mar hoc'h eus arc'hant. Rak ne vo ket marc'had mat : 25 hroc'henn a ranker kaout evit ober eur vantell a-zoare.

Ar c'hastored-mañ a zo e koad Pontkalleg evit kement-se. Eun den yaouank o chom en eur gerig añvet ar Groaz-C'hlas, war vevenn ar C'hoad, en doa laketa en e soñj sevel eur rummad eus al loened-se. Pevar en doa da genta. Neiziadou o zo bet ac'houde. Emaint tost da dregont hirio. Ha lod a zo bet gwerzet, par ha perez, evit rei an tu da saverien-all, d'ober eveldañ.

Albert Le Bail a vez graet eus ar paotr. Hervez ar pezh en deus displeget d'in : tu a zo da sevel al loened en eur waremm-c'houez, gant ma vo taolet evez d'o derc'hel gwarnet mat. Ret eo eta sevel mogerioù simant endro d'al lec'h, rak ar c'hastored a zo tik d'ober foullou en douar, ha da vaesat ! Albert Le Bail en deus 'n em gemeret en eur c'hiz all : en eur porzig simantet, gwar net gant mogerioù a zaou vetr hanter a uhelder — et simant ive — kempennet en deus logelloù, evel re ar c'honikled — dispartiet mat, rak an diaouled-se a glaskfe trouz an eil ouz egile. Al logelloù e zo e simant ive : Ar c'hoad a vefe debret... War-c'horre, treset ez eus bet eun orjalenn lagadek. Hed ha hed d'al logelloù, e red eur rigolenn dour lec'h ma 'z a ar c'hastored da c'hoari, pe d'ober... o doberioù. Setu perak e vez mat lakat dour fresk da redek eur wec'h bemdez, rak buan e vez louzet. O maga, n'eo ket diés ; eul lur vat bemdez a veur a dra : glazadur kentoc'h, pe avalou-douar, restachou legumaj an ti, deliou pe drailhajoù irvin, betrahez, pe kaol, ne vern. N'int ket figus... Roit deza avat, eun tammig koad tener da beb koulz : haleg, koad-gwern, koad-kren, da c'hoari, ha da lemma o dent skrignüs.

Eveljust, n'eo ket eun desaverez evel boumañ a reio d'oc'h gounid bernadour arc'hant. Dao e vefe ober muioc'h. Ar pezh a glask amañ Albert Le Bail eo sevel meur a bar ha meur a barez, tadou ha mammou evit spleita d'ar goulennoù. Da c'hortoz ma vo trawalc'h a zesaverien hag a loened evit sevel eur bern mantelloù. N'eus ket da gaout aon e chomfe ar c'hrec'hin hep beza gwerzet. Kavet e vez sao dezo es-kaer...

Evel a vefe kavet ive da veur a groc'henn all, adal ma vefe kemeret ar boan da sevel gouezaj all : evel ar chas-dour, ar c'haerelled-bras, ar pudas-ked, ha me 'oar me : an holl loened gouez-se a c'hell beza savet. Ar c'hi-dour — eul loen diés bras da dostât e gouez, ha da dapa — a zo ken karantezus, ken feal hag ki an ti, adal ma vez dalc'het ha bouetet mat.

Nag a vicherioù — iskiz marteze — met plijus evit ar re o deus penna-dou douar gouez pe goullo, hag amzer ouspenn !

Eul loen es da sevel dre amañ a vefe an dañvad anvet « Boukhara » ; an hini a vez savet en « Astrakhan » evit e groc'henn. Kavet e vez en Azia-bell, emesk al lanneier noaz ha sec'h, lec'h ma vez treut pe treutoc'h ar peuri. Ni

Ha goulennet hoc'h eus **Kartennou bloavez mat brezonek** : Jos Le Doaré, Photographe, Châteaulin, Finistère. Skoazellit ar re a labour evit ar brezoneg.

hon eus ive lanneier noaz : nê vez mui gwelet deñved enno. Hor bouetañ a zo kalz gwell eget hini an Turkestan pe ar Mongoli sec'h kraz. Met kement-se ne c'hell ket beza labour eun den hepken. Met aon e vez oc'h en eme lakat da c'hoari gant traou nevez : n'eus ket da fiziout. Met eun amzer a zo bet, n'o doa ket an dud muioc'h a fizians er c'hounidigez avalou-douar.

*

En eul lavarout kaer diwarbenn traou evelse gant Albert Le Bail, e reas hemañ d'in anaout eun den all eus An Oriant a vage menozlou all. Hervez an den-se, hout a zo bet kastored gwirion en hor bro gwechall goz. Kavet e vez c'hoaz, hirio an deiz, eun tri c'hant bennak anezo, war vordou ar ster Rhones, e tachennou gwarnet ha gwarantet gant ar Stad. P'eo gwir e vevont du-ze en o ês bremañ, e c'hellomp-ni kredi e oant niverusoc'h gwechall, hag e vezent kavet dre amañ ive. Nemet, koad a zebrent !... Ha brezel a veze graet dezo evit o c'hroc'hen ken brudet ha ken talvoudus.

Eun dra ouspenn a-zivout kement-se : Dao eo evesaat penaos ano koz ar c'hastor e galleg a oa : *Bievre*. An ano-se a vez kavet e meur a gornad : eur gêr du-mañ, eur sterig du-ze, tostig tre da Bariz hag er Sologn.

Ouspenn, kavet ez eus bet dent kastored endro da eskern tud e meur a doull bered-koz, evel e Sant-Urnel hag e lec'hioù all. Lakomp e veze an dent-se braoigou, pe marteze traezou enep d'ar fall-degouez. Gellout a reer, eta, beza sur, ez eus bet kastored er vro-mañ, met setu pell 'zo... Hag e vefent c'hoaz, panevet d'an dud beza bet fall outo. Aze, an dud a zo bet digalon ha dizanaoudek.

Rak dalc'homp scñj eus eun dra ; eun amzer a zo bet ma oa fall pe falloec'h, truek, pe truekoc'h stad an dud war an douar-mañ ; eun amzer n'o doa nemet armaj dister ha binviou despezus : petra ober gant eur vouc'hal kailhastr ? N'oant ket barrek da ziskar eur wezenn hepken ! Ar c'hastored a oa neuze sikourus d'an dud : gant o dent hir ha lemm, int a ziskare ar gvez ; int a save chaoseriou, war dreist pe hed ha hed ar steriou hag al lennou : chaoseriou uhel, ledan, sounn gant mellou postou koad. Trugarez dezo : kalz êsoc'h e veze d'ar paour-kez tud treuzi meur a lec'h digempenn. Ar c'hastored a zo bet eta ijinou-rien genta an hentou hag ar Pontou o servija Mab-Den.

Setu perak e tennan ma zok dezo amañ.

Ha just awalc'h, en eur sellet berr ouz an tok em eus evesaet eun dra : *kroc'hen kastor eo...*

Job Jaffré.



E koun an amzer goz

PAPIER KOZ

N'ouzon ket digant madelez piou eo deut betegennon ar paper koz a lennoc'h amañ. Bennoz Doue d'an neb hen digasus d'in.

Moulet eo amañ dres evel m'emañ nemet ar pennoù maro, an eskern hag an daelou a zo e pep tu e penn ar paper.

L. L.

Abrege a vuez Marc Ar Ferec

(Hañvet AR MAESTR, dre ar c'hontre),
Decedet e Braspars, 18 Eost 1840, dre un taol-goat.

Ne veulit an dén, eme ar Fur.
Ne met goude e varo !...

(Or. Funebr an Escop.)

An dén a propos
Maes Doue a zispos !...

(Imitation J.-C.)

MARO EO VA ZAD., ha Maestr venerabl, Brasparsiz ! ho Maestr-coz, Lopereguiz ! ho Fried-quer, ho souten, ô va Mam-baour ha carantezuz... !

Treguerriadiz ! en ho prô e zoa ganet ha maguet ; scollet en Castel-Pôl e amser an Aotrounez De La Marche, Péron hac Abgrall, brema Person Sizun : an Escop bras-se, eus an exil e Londrez, ha guemennas pañ evinta ar blavez diveza ; rac evit beza Beleg e studie, ha ne falvezas quet dezàn monet d'a Siminer Expilly !

Rac-se ive, é dad, pehini en devoe ar maleur da gridi, un instant, an nevezentioù diroll, er chasneas eus e dy... 1790-1792.

San-Thegoneguiz ! d'ho parrès en em repuas ; istim hag enor en deus bet en ho touez ; er c'hlevet em beus aliez ganta-e-unan ; ho Person, ho familhou respectapla etouez pere é bet cuzet, hag eus a pere en deus scollet cals a vugale, ha c'hiu, terrouer Ker-Annôd, oll o peus memor eus a ano MARC AR FEREC... Ker-Annôd ! prenet gant va zad-coz, pa zigoras e zaoulagad d'ar virionez, ha pa rentas e istim, e garantez-tenerra, e gonfiang, d'he vap MARC, pehini en devoe bet an heur, da souff, heb en em glem, evit ar feiz, còler e dad, ha persecution an duq impi !

Ac'hano e temezas d'hor Mam Theresa Morio (chasseet, epad ar revolution, evel al leanezet, eus a gohent Landerné, e peleac'h ar memeus Aotrou De La Marche er c'husulias da non pas ober vœu) : hon tad-coz a roas e venediction d'un heured quer santel, graet e cuz, e creiz eur c'hoad bras (Coat-ar-C'hannou, en quichen ar Faou), gant eur beleg catholic ! (98)

Neuze (1800), dre aliou mad, e zejont ho daou d'ho parrès humbl, ô Lopereguiz, evit fonti enni, gant ho danvez propr, ar scôl gañr-se pehini e deus roët quement a Velefen d'an Ilis, quement a instruction-vad d'an bopl, ha d'ar vro-oll.

Tadou ha Mamou-e-famill christen ha vertuzus-meurbet ! ô Loperec, va brô ne z'oc'h quet an disterra emeus an oll-broioù ; rac sortiet eus ac'hanoec'h steredennou brillant pere o deveus enoret an Ilis hag ar bed ! Ennoc'h ho deus florisset daou zen modest hac enorabl, Hervé ar Salatin, ho Maer, ha va Zad, e Secretour hag ho Maestr, pere, pep ini en e condition, dre ho moderation, ho gouarnamant-vad, o deveus sicouret ho Person-quent, an Aotrou Pape-côs, da breservi ar Barres eus meur a valeur hag eus tromplevez ha finessaou-fall an dud. (1800-1816.)

Savit ho penn ive, Brasparsiz : passeet ar glao hac ar tourmant, ha confrontet an implete : an Avel-vad, an Noel ancien, o c'heus clevet dre brovidans Doue ! ha chetu ar Maestr, ar Patriarch, eguiz m'er galvit aliez, o vont, a berz an Aotrou St Luc hac an Aotrou Dombideau, an Escop-se quen galloudec, d'ho couarn evel Maer, d'ho c'hinstrui evel eur scolaër mad ha debonner ! Gouzout a rit peguen ignorant é bet ha parrès : he-bien ! dont a reas va Zad courachus ato, exemplus, ha fidel de lezen : e garet o peuz ; admira rit c'hoas e garacter laouën, e volesti vras, e simplicité devot ha christen ! En o touez hag en oll broioù en deus graet cals vad d'an oll ; droug da zen : Tremenet é, evel e Vaestr Divin, en eur ober ar vad...

Respect en deus bet ganec'h ; respect, enor ha recompanç gant an Esquibien, ar Velefen, an Academi, ar Prefejou, ar Roue memes ! respect hag istim an oll e general ! O Finistaer, ô va bro ! dre exemp va Zad, e zoun en em roët da instruction ho pugale ! Va zicourit, me ho suppli, er mission vras-se !... Ne zomp mui nemet tri : ur c'hoar leanez er Sacré-Cœur, va breur ha me...

Deut da enori bez hon Tad venerabl, ha ne ankouac'hait quet é Intanvez hag e Vugale, oll mantret ha melchoniët !!!

Oh ! dreist pep tra, en deiz e Servich, hac eur véhic-all benac, pedit, pedit an Aotrou Doue, hag ar Verchez Vari, pehini a servichas gant quement a zevociou, en delivranç d'e ene euz a boanlou ar purgator !!!

Si iniquitates. — De profundis.

NOTA. — (Ar Servich-bras, evit repos ene MARC AR FEREC, a vezo celebret, en Ilis-Parres e Braspars, d'an unan-varnugent a vis Guengolo quenta, 1840, da zeg heur. Pidi a ran e guerent, e scolariën, e vignonet da assista en Offic divin.) Requiescat in pace. Amen.

E Montroulez, d'an 22 a vis Eost 1840.

Ee Vap Yaouanq, Bachelier :
J.-M. LE FEREC.

Approuvet gant an Aotrou K/AMANACH, Person Montroulez :
K/AMANACH. Chan., Curé de Morlaix.

Vu par le Sous-Préfet de Morlaix :
L. LEZIART.

E-MONTRULEZ, IMPRIMERI LEDAN.

KEHEER

Ar Vretoned a zo gant ar re zesketa e Bro-Frans.

Gant an eil lodenn eus paotred an tenn 1953 e departamant Penn-ar-Bed, e oa daou vil a baotred yaouank ; n'oa nemet daou kontet evel dizek, lakaet e renk « illétrés » : unan dre vil nemet ken ! Pe seurt departamant a lavaro gwelloc'h ?

N'eo ket, sur-awalc'h, eun departamant all — ha n'emañ ket e Breiz ! — hag a gonter ennañ, war gant paotr yaouank diwar ar maez, 60 hag a oar lenn, 45 hag a oar skriva, 65 hag a oar konta.

Perak eta ez eus muioc'h a zeskadurez etouez ar Vretoned yaouank eget e meur a lec'h all ? marteze — sur awalc'h zoken — o veza m'eo diouyezek hor yaouankizou. Gellout Komparachi diou yez a zigor ar spered.

En devez ma ne vefe mui komzet ar brezoneg e Breiz e vo rabat gant an deskadurez ; dalc'homp eta d'ar brezoneg, *komzomp brezoneg d'ar vugale, galleg a zeskint er skol ha galleg mat, da heul ar brezoneg.*

Ar Vretoned n'eman ket o zadou droad er memes botez.

Lod a lavar eo ar vretoned tud diwarlec'h hag a jom kenetrezo, prennet o spered, da gement o zo er maez eus Breiz. Ya moarvat ! En deveziou mañ, unvaniez al labourerien-douar he deus pedet paotred yaouank diwar ar maez da vont da ober eur veaj studi d'an Izel-Vro (Holland). Betek Paris o doa da vont diwar o c'houst, goude-ze o doa eiz pe zek dervez da dremen en Izel-Vro diwar goust ar gouarnamant. Daou baotr yaouank war 'n ugent a zo nevez aet, e penn miz Eost, pevar anezo a zo eus departamant Penn-ar-Bed. Ha goude ma ne vefe bet hini ebet eus ar peur-rest eus Breiz — hag ez oa, n'oun ket nechet — ar Vretoned o deus kemeret aze adarre muioc'h eget o lod.

War dachenn ar binividigez da denna eus an douar, ar Vretoned a zo gant ar re genta.

Eur gartenn a zo bet embannet gant ar *C'hourrier* hag ar *Progrès* (28-8-54), hag a verk peseurt departamantec'h a zo pinvidikaet ha pere a zo paourat etre 1946 hag 1953. Unan war 'n ugent nemet ken a zo aet war binvidikaet, er c'halz anezo departamantec'h gant labouradegou. Rouez eo an repartamantec'h a zo savet war o zach netra nemet diwar al labour douar ; etouez ar re-mañ emañ Aodou an Hanter-Noz ha Penn-ar-Bed, elec'h ha ne jomer ket da c'hoari gant doareou koz, met e lec'h ma poanier gant drevajou digaset gwellaenn enno a vloaz da vloaz dre ijin hag aked al labourer.

Er bloaz 1953, departamant Penn-ar-Bed eo a oa da genta evit an niver stlejerien pe trakteurien prennet a hed er bloaz.

Gout a reomp edo da genta ivez evit an tiez-nevez savet — goude Paris evel just —.

Kaer a vo lavaret hag aslavaret e vo kavet tud digompren awalc'h atao evit kredi eo Breiz eur vro diwarlec'h. Azen hag Azen a zo, hini gant pevar droad, hini all gant daou droad.

F. C. B.

Kuzul-Meur ar Finister en deus nevez votet 200.000 lur evit an F.C.B. Kemend-all a vo graet gant Kuzulioù-Meur ar Morbihan hag ar C'h.-d.-N. Ar skolioù o deus ezom levrioù da zeski brezoneg a c'hell skriva d'eomp : Bleun-Brug, Châteaulin, Finist. Evit netra e vezint kaset d'ezo.

Skolioù eskopti Sant-Brieg, a c'hell goulenn vlez, war gont an F.C.B. Levr « Ar Bozec » da zeski brezoneg.

Stad ar gelaouenn « Bleun-Brug ».

Koumananterien e.....	1953	—	e 1954
Pen-ar-Bed	769	—	718
Aodou-an-Hanter-noz	57	—	71
Morbihan	32	—	36
Departamantec'h all	161	—	189
Brolou estren	38	—	41
En holl.....	1057	—	1055

Koll a reomp koumananterien e-touez ar bobl. Ar re goz a varv. Ar re yaouank n'ouzout ket lenn. Evit arbenn ouz an drouz-se n'eus nemet eul louzou : **ar brezoneg er skol, ar buana ma 'vo gelliet.**

E-touez an dud desket, avat, ez a hepred hor c'helaouenn war-raok. En diavéz da Ben-ar-Bed, e weler hon eus graet 49 koumananter nevez.

Skol dre lizer.

Diés bras eo lakaat ar journalioù pemdeziek da vruda hor skol dre lizer. An « Telegramm », evelato, en deus nevez komzet eus hor skol. Warlerc'h ar pennad bruda-se ez eus deuet 39 skoliad nevez d'eomp, ar pezh a ra bremañ 213 war ar roll. Bennoz Doue d'an « Telegramm ». (1)

Festival al lazou kana e Montroulez.

35 laz-kana eus ar Finister, a zo bet en em vodet e Montroulez, d'ar 7 a viz Du, evit eun Deveziaad Kaniri. Oferenn 'bred dispar : an Ao. 'n Eskob Fauvel, en e brezegenn goude trugarekaat an holl, a veulas « Kantik ar Baradoz » kanet e brezoneg, e 4 mouez, gant ar ganerien. Goude merenn, abadenn vras er c'hochu. Eul laz-kana, hepken, a ganas e brezoneg : hini **Plouzeniel**. N'eo ket int-i eo a blijas an nebeuta d'ar selaouerien. Pell ac'hano ! « Kantik ar Baradoz » a voe kanet adarre. An Ao. beleg Dilasser, en eur brezanti ar c'hantik-se a lavaras : « **Eur pec'hed eo lezel da goueza hor c'hantikou brezonek...** »

A-zivout ar c'hantik-se e lenniomp en « Ouest-France »... « Signalons que de nouveau, comme à la grand' messe, « **Jezuz pegen bras ve** » exécuté par l'ensemble des chorales, empoigna l'assistance ».

Hag ar « Progrès de Cornouaille » goude komz eus ar c'hantik-se ive, a lavar c'hoaz : « La preuve venait d'être magistralement donnée que les chorales du diocèse de Quimper et de Léon peuvent et doivent chercher dans le folklore breton le fond de leurs interprétations. Elles y gagneront, certes, et leurs auditeurs également ».

Kendalc'h.

Ar gevredigez-mañ hag a genstroll an holl strolladoù breizek he deus bet, er miz-mañ, teir vododenn : D'an 10, e Kemper, emvodadenn ar gevrenn sevenadurel ; d'an 11, emvodadenn ar strollad-ren, ha d'an 21, bodadenn-veur ar gevredigez, en Oriant. Renet gant an Ao. Per Mokaer, ar bodadegou-se a vezo pouezus evit labour ar bloaz a zeu. En Oriant, an Aotrouez Keravel ha Seite, a roas da c'houzout penaos eo bet rannet etre an diou skol arc'hant an F.C.B. hag an implij bet graet ganto. Evit ar pezh a sell ouzomp, gwelit hon niverenn miz Here.

Deveziou-studi.

D'an 28 a viz Du pempet, devez studi, e Landi, savet gant ar Bleun-Brug evit yaouankizou al Lazou-Kana, ar c'hele'hioù hag ar bagadoù sonerien. Oferenn da 10 eur. Sarmon vrezonek gant an ao. Troal. Kaozeodenn war ar c'han-pobl gant an Ao. Derian eus Kloerdi-Bihan Santez-Anna-Wened. Goude merenn, e Maner Keryann-St-Nouga, Kaozeadenn gant Jos Doare war an arz breizek.

D'an 12 a viz Kerzu, c'houec'hvet devez-studi ar Bleun-Brug, e Baod, Morbihan. Deveziou all a vo graet, e-kerz ar goañv, e Douarnenez, Kernasen (Morb.), ha marteze unan all e Breiz-Uhel : Dinan, pe Roazon.

(1) Edo moulet ar gelaouenn pa lenniomp ive eur pennad war an *Ouest-France* diwarbenn hor skol dre lizer, gant kalz goulennoù ouz e heul. Bennoz Doue d'an O. F.

Klevit 'ta !

ar Bleun-Brug a embann evit 1955
daou gonkour bras gant **55.000 lur** a briziou
Evit ar re yaouank hag an dud vras

I. - KENSTRIVADEG AR SKRIVA

Evit an holl.

Priz kenta : 15.000 lur.

Eil prix : 7.000 lur.

Trede priz : 3.000 lur.

Sevel eur studiaden war an danvez-mañ :

« **PENAOs MIRET OUZ AN DIVROA, EN EUR SEVEL E BREIZ,
« LABOURADEGOU PE UZINOu A BEP SEURT.** »

Kas al labouriou, arak ar c'henta a viz Gouere, da V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finistère.

Ar priziou-mañ a zo bet kinniget gant eur mignon d'ar brezoneg.

II. - KENSTRIVADEG AR PREZEG

Evit ar re yaouank, paotred ha merc'hed eus 17 vloaz da 25 vloaz.

Daou briz kenta a 10.000 lur, kinniget gant an Itron a Rohan-Chabot.
Daou briz a 5.000 lur kinniget gant ar Bleun-Brug.

Sevel, war an danvez-mañ, eur brezegenn a bado 5 pe 6 munut :

« **DISKOUZIT PETRA ' RA PINVIDIGEZ EUN DEN** »

Ret e vo da bep hini gouzout e brezegenn dindan eñvor, hag he displega, deiz ar Bleun-Brug, dirak eur juri.

Ar Bleun-Brug bras a vo e Landivizio

Evit AR C'HENSTRIVADEGOU-SKOL : lenn, kana, displega, skriva, tresa, gou-
lenn an danvez, bet moulet en eul levrig kaer, digant V. Seite, Bleun-Brug, Château-
lin, Finistère. Kaset e vez evit netra, d'ar re holl her goulenn.



Proposition de vœu en faveur d'une organisation normale de l'Enseignement du Breton

LE CONSEIL GÉNÉRAL DU FINISTÈRE, qui a toujours soutenu les efforts déployés en vue de défendre la Langue bretonne, partie essentielle du Patrimoine culturel de notre région, constate avec une vive satisfaction le succès croissant des « JOURNÉES DE LA LANGUE BRETONNE », organisées chaque année par la « FONDATION CULTURELLE BRETONNE » avec le concours des Cercles Celtiques, — Journées qui traduisent nettement l'appui donné par la population à l'enseignement du breton.

Il constate par ailleurs l'intérêt suscité parmi les Jeunes par l'étude de la Langue bretonne et les excellents résultats observés par les Maîtres, là où des Cours ont pu être organisés de façon régulière, et il en conclut que l'enseignement du breton a devant lui de grandes possibilités de développement pour peu qu'il soit encouragé.

Le Conseil Général est informé que malheureusement la plupart des Cours de breton fonctionnent dans des conditions difficiles : recensement des élèves volontaires non effectué dès le début de l'année scolaire, — heures de cours mal placées et trop peu nombreuses, — placement des Professeurs compétents non assuré, — crédits insuffisants, — manque d'instructions pédagogiques, absence d'Animateurs assurant la liaison technique entre les Maîtres, — etc...

Le Conseil Général rend hommage aux Professeurs et Instituteurs qui se dévouent pour assurer dans ces conditions un enseignement du breton qui n'en est encore qu'à ses débuts, aux Chefs d'Etablissements qui manifestent à cette étude toute leur sympathie et toute l'aide compatible avec les règlements actuels, ainsi qu'aux Sociétés culturelles qui mettent du matériel pédagogique à la disposition des Cours.

Le Conseil Général regrette vivement le manque d'organisation de l'enseignement du breton dans les différents Degrés et surtout l'absence totale d'encouragements officiels en faveur de cet enseignement ainsi que la non réalisation des promesses faites à de nombreuses reprises par le Ministre de l'Education Nationale.

Il se rend compte que la Loi du 11-1-51, au vote de laquelle ses décisions antérieures ont largement contribué, n'est appliquée ni dans son texte, ni dans son esprit, en raison des limitations arbitrairement introduites par les Services ministériels.

En conclusion, le CONSEIL GÉNÉRAL DU FINISTÈRE se déclare prêt à soutenir en particulier les points sur lesquels a été attirée l'attention de M. le Ministre de l'Education Nationale, le 3 Décembre dernier, lors de l'audience accordée par lui aux représentants de la « Fondation » et du C.E.L.I.B. et en présence des Parlementaires bretons et des Autorités Académiques de notre région.

Il insiste en particulier pour que disparaisse l'état d'esprit hostile à l'enseignement du breton qui règne dans les Services ministériels, état d'esprit qui se traduit constamment par la non réalisation des promesses faites aux Parlementaires et représentants des Groupements culturels et pédagogiques bretons.

Il s'élève enfin contre la décision NON MOTIVÉE du Conseil Supérieur de l'Education Nationale qui a refusé l'inscription des Certificats de Celtique sur la liste des Certificats admis pour l'obtention d'une licence d'enseignement. Cette décision enlève tout intérêt pratique aux Certificats de Celtique délivrés par la Faculté des Lettres de Rennes et compromet gravement la formation de Professeurs qualifiés pour l'Enseignement du Breton dans le Second Degré.

LE CONSEIL GÉNÉRAL DU FINISTÈRE tient à déclarer qu'il est décidé à continuer à défendre les droits de la Langue bretonne à l'enseignement, son action dans ce sens étant guidée par le souci de conserver à la France l'un de ses trésors culturels les plus précieux et d'éviter à notre pays de se trouver distancé par les nations étrangères sur le terrain des études celtiques.

AIR CHISTR NEVEZ ⁽¹⁾



Peizanted, ar gwez 'zo karget
 A avalou melen (bis)
 Gwalc'hit ho fustigou, paotred,
 Ar blead her goulen.

D'an dud eus an ti ha d'ar vistr,
 Ha pa ver gant ar pred,
 Netra ne dalv eur bannig chistr
 'Vit torri ar sec'hed.

Ha pa zeuy ar goañv kalet
 Kargit ho millinou,
 Ha troit gant plijadur, paotred,
 Malit hoc'h avalou.

Ar chistr a zo evaj an holl,
 Ar pinvik hag ar paour;
 Mes, mezvi gantañ a zo koll
 Ha dismantr evaj aour.

Ha bremañ, gant ho nerz vrasa
 Stardit war ho presou.
 Ar chistr a red: ar frond c'houeka
 A sav dre ho krañjou.

Heñ 'zo gwad ar wir Vretoned;
 Hepdañ n'hellont beva.
 Chomomp feal d'hor chistr, paotred,
 Mes gouezomp hen eva.

Loeiz Herrieu.

(1) Troet diwar yez Gwened — fustigou: barrikennou — ar blead: ar bloaveziad —
 presou: gwaskellou, pressoir — ar frond: ar c'houez vat — ar vistr: ar vistr.